

N2-5-056

1

Quantité pour buetz Sant-Ervan



Velaouet oll quitibunan
Buetz an Kontrou sant Ervan,
Buetz Sant Ervan Heloury,
Disquet-hi oll, me ho suppli.

Ganet eo bet Dre c'hrac Divin
er maner Deus a Quervatrin,
En quichen ar guer a Dreguer,
Voardro eur c'hart leo diou haer.

he tad voa hanvet heloury,
hae he vam tesor ar Plessy,
Lud pinnig haer a galite,
hae o Desoa Doufane Doue.

Quent erit na vije ganet,
D'he ram tesor voe revelet,
Penaus ar buguel a dougue
A vije eur Sant bras un de.

Pa voe ganet, na voe quiet pell
Na eure quelet, en buguel,
E voa d'ar vertuz destinet,
O vezan Doue, humbl ha perfect.

He Dad hac he Nam, hep dale,
En discas da garet Doue,
Hac a roas eur maeste dezan,
D'en disquin da len ha serivan.

Goude, e sanchont d'o buguel
Eur breceptor fur ha santel,
Pebini a discas buhan
Al latin d'o mabie Ersoan.

Profitan ar re ² assambles
En study hac en santelez,
Prepret oas en em occupin
O studiam hac o pudin.

Pa voa a bezarze bloas oaget,
Da Paris a c'hoantas monet,
Dre ma. clere e voa enno
E fleurise ar squiencho.

Er guer man e eure quelet
He santelez hac he speret,
He speret caer o surpassi
Aer re voa gantan er study.

Graet gantan he philosophi,
E discas an theologi,
Goude-se e'hoas ar quier-canon
A discas en perfection.

Ober a re quelet ive
Ar santelez Deus he vuez
Ne zebre tam bara quinis,
Maes bara heyy, be bara gris.

Ar c'hié, an nou, ar pesquet,
Ar ve voar he d'aul serrichet,
Ar zistribue peurruan
D'ar bievien yac'h ha d'ar re glan

Pa voa pevar bleas voarmignent,
Varant bras ha leun a squient,
Ec'h aes c'hoas, vit en em arane,
Deus a Paris da Orleans.

Enon, gant un Doctor habil,
E tescas c'hoas ar quir civil
Evit jujin, gant justice rad,
Pep sort proces ha pep debat

3
Er guer-man e renneas crenn
D'ar c'hié, d'ar quin evit biquen,
Jac a gonsacras he vuez
Da serrijin parfait Doue.

Ar brevicel a recite
Jac offic ar Verc'hes bombe,
Casper, yun a re pep guener,
En penor da varo, hon Salver.

Gout a re penaus ar squient
Pa hell quet rentan an dud saent,
Ma na unissent assambles
Ar anvrou mad gant o furnez.

he study gantan achuet,
Da official vuez lequeet,
Da varner lis en Ppocion
Gant Maurice an Arreagon.

Escop Breguer, neubent goude,
Informet deus a he vue,
En pedas da zont daretan
Dre un istim bras eritan.

Ser Sant, Dre humilite vras
D'he escop a obeissas,
Pecet a roes gant santelez
Am urz sacr a releguez.

Am escop en eure ractal
Barner ilis, Official,
A ro dezan incontinant
Barus Credrez a roa vacant.

Un neubent goude quement-man,
E roas Louance dezan,
Dre ma roa eur barus carguet
A ricou fall, tud direglet.

Maes sant ^{Al} Civoen, gant fersour bras,
Ser bapl paour-man a instruas;
O preseq, o catechisan,
E chanchas crenn ar barus-man.

Da roa barner, ec'h angaje
Lies a vech Dre charite,
Ser bartou da accordin,
Da shom en peuc'h, hac hep plaedin.

Ha pa renque reie eur setane,
En roe just, en consciance,
Fajin a re herve Doue,
Hep egard da nep qualite.

Am de quet hepguen da jujin,
Maes dont a re c'hoas da blaedin
Evit ar paour, en donaison,
Barus en pep jurisdiction.

Ma care'r justice so breman
Ober evel ar barner-man,
Ve quet quellies commettet
Ar injustice hac a bec'het.

Mar boa parfait den a justice,
Parfait oa c'hoas den a ilis;
Na glasque nemert gloar Dou
Ha disquin d'an oll hent an ee.

Lies a rech e presegue
Peter reach er memes de,
Ha seizh quech, eur guener-ar-g
Ar Bassion a bresegas.

N'en de quet heppuen da breseg
En Credrez hac en Louanee,
Maes er paroujou all voar-dro
Ha Dre Vreiz en escoptyo.

Grac Doue, Tre he sarrmoniou,
Ar Douche an oll calonou,
Ar re d'ar bec'herien brassan
Donet d'en em gouvertissan.

O vont da breseg, e casas
Eur pont goloet gant tour bras,
Mees an tour a arretas crenn;
Erit en lesel da dremen.

Quer bras voa he devotion
Ma fonte casi he galon
En he orason en ilis,
Ha pa offre ar sacrific.

Glebian re lies he dillad
gant an daerou'n Jaoulagad,
Pa zeue d'en em breparin
quent erit dont da celebrin.

Eur veach, en pad hec oferen,
E voas quelet a us d'he ben
Eur flammen dimeus an envou
Qu'it a ma voa er goureou.

He dy a voa ty ar besien;
Deut mad a veant: hep refus den
O lojan re hac o guisgin,
Ha rein dezge boët da dibrin.

Eur veach roet d'ar besien
he oll ed hep menel greunen,
Dre eur miracl, en em gavas
he c'hrignel leun eus aed craz

Eur veach all c'hoas n'in defoa
Memert eur quennegad bara
hac en dont d'en distribuën,
Hep miret un tam da gibrin

Chom a eure ~~bara~~⁶ gantan,
Quement evel quent, da droc'hau,
Goude began rassasiet
Gals a beaurien affamet.

Changst; tud avaricius,
Beet ous ar paour truezus;
quelet pegement ez eo mad
Doue ous an dud charitabl.

En voa tad an orphelinet,
Protectour an intanveset,
Souten an oll dud ezonus,
Ha confort ar re hirvoudus.

Mad voa ar saent ous peb unan,
Memert ous he gorf e-unan;
En cas a re hac en traeti
Evel he vrassan ennemi.

Eur rochet a reun a Dougue
Voare he gorf santel nos ha de,
he vele eur gleud queroest,
hoc ar bibl sacri voa he blues

Bemde en em discipline,
ha casi bemde a yuner,
Na deue da Pibrin jamas
Para quen, na quig, na fraez

Erfin ar Sant so Decedet,
Pa voa hanter-cant bloas aget,
Glac'haret bras voe tud ar vro,
Pa voe clevet e voa maro.

Quement a bopl a visite
Ar c'horf dimeus an den Doue,
Moa Thomas tre de exposet
hep gallout bezan interest.

Marret eo bet en Ferrarzin
Ar Sant leun a c'haacow divin,
Er c'hathedral voe interest
he gorf santel gant pep respet.

Er bloarez tre ha trizec cant
eo bet Decedet ar Sant,
Dre he viraclow eo bet
Mabout goude canoniset.

Pobl a Credrez ha Louance,
Beet devot d'ho person bepret;
Er ennoe eman o pidi
Evidoc'h hac an escoply.

Antron Sant Ervoan binquet,
So an ee a c'hloar curunet,
Pliget quenac'h hon preserri
Dious pep drug ha pob annui.

Obtenet Jimp digant Doue
Ye derijane haec he garante,
Ave c'haec d'in serrijin er sad,
Da garet oll eur maro mad. - Amen